

M'eus-me choajet ur vestrez a gar en odevi  
M'eus-me choajet ur vestrez a gar en odevi  
Kaer em eus, petra gober, n'hellan paraat doc'hti

A pa partiañ d'er park, d'er park de labourat  
Eh 'r boufam d'er suler da gargiñ he sac'had

Ha pend eo karget er sac'h 'faot er c'has d'er velin  
Ha goulenn g'er meliner mar faot dezhañ er malin (dezhan = tan)

« Me ho supli, meliner, malit din ma sac'hat,  
Laoskit er brenn er velin, kas' er bleud d'er marc'had ! » (din = ün)

Ha pend eo gwerzhet er bleud ha touchet en argant  
Eh a 'r boufam d'en davarn de evet ag he hoant

« Piskandoull, 'lâr 'r meliner, mall eo monet d'er gêr ! »  
« Pas ket hoazh, 'lâre er wrac'h, troioù 'm es hoant d'ober !

Soa'n, halen, gouloù rousin, em eus hoazh de breniñ ! »  
Ha butun en tabetier, eh a 'r boufam d'er gêr

Ha pand a 'r boufam d'er gêr dre 'n toulleù skoselleù  
E oe roget he danter ha torret he boteù

Ha foutre-kaer e ran-me a me mestrez Julienn  
Ma n'hell ket donet d'er gêr, hi 'chomo er vouilhenn

Ha p'erru er wrac'h er gêr, karget mat ha grognoñ,  
Er mestr a serro e veg, hi he deus hoazh rezon !